

(275, suite)

## D'am zrompill.

Difun, difun, va zrompill, va mignonez,  
Mall bras a meus da glêvet ac'hanout;  
Allas! gamén eo collet va levonez,  
Ha caer a meus, n'ellân mui e c'havout.

(276)

Va c'halon quéz zo carguet a velconi,  
Eur gouabren deo var va zal areler;  
Vit va selaou, siouas din, n'am eus himi  
Nemedout-te, va zrompillic dister.

Peguer douç eo ar son demeus da laonen,  
Pini a zent ouz va biz o crena;  
Ma ne dout get evit va renta laonen,  
Va zoulagi ares da viana.

Ra vezi ta, e peb amzer evidon,  
Coulz hac hirio ur gompagnonez vad;  
Hac e carin ac'hanout a wouir galon,  
Gen a verzo serret va daoulagad.

Alph. Lansalut.

(Vol. IV, p. 275-276.)  
4 str. numérotées.

## Harmonic imitatif.

Ha pebes trouz gourdrourz  
A ra en ifernio  
Stalafou an nôr spontus  
Var o mudurennou.

Alph. de Lansalut.

(Vol. IV, p. 276, suite).